

Var ho roc'h santel n'em gavomp laouen,
Vel ar bokedou var ar glasteren.

Al labourer keas gant e veac'h kroumet,
Pa vel ho chapel a zo frealzet.

Dioc'h tan a kurun, dioc'h maro subit,
O santez Barba, oll hon diouallit.

Ar mordeat paour, pas c'hoez avel foll,
Ouzoc'h à c'houlén ne dai ket da goll.

Pa vezont skoet gant eur gaol glenvet,
Roskois ouzoc'h prim en em erbed.

Varnomp kendalc'hit da skuill ho pennoz,
Ken m'a zaïmp ganeoc'h oll d'ar barados.

EVELZE BEZET GREAT

Quimper, 10 Juin 1896.

Permis d'imprimer : "

A. SERRÉ, vic gén.


Ar c'hantik m'an vo gwerzet evit sikou paea an dispignou grea
da sevel chapel santez Barba.

Moullét e Montroulez, e ti A. Le Goaziou.

KANTIK

SANTEEZ BARBA

E ROSKO



Ton : Rouanez Arvor

Diskan :

O santez Barba, devot ho meulomp,
Hon c'halon zo deoc'h, petit evidomp (bis).

Evel eur rozen, oa kaër ho kenet,
E hün ho kalon a lem ho speret.

Penherez e z'ouac'h ha pinyidik braz,
Eus an oll vadou o poa da c'hoaz.

Mes, deut oc'h a benn, gant sikour Doue,
Da ober disprij var an oll draou-ze.

Dioskor, ho tad, a ioa eur païan,
Eur païan kaled, m'ar deus bed unan.

Dirag e balez savas Idolon,
Vit gounit e verc'h d'he falz kredennou.

Varnezo hepret Barba rea faë
Rag ne zougent ket merk ar guir Doue.

Evit rekompans, e teuaz eun deiz
Da gaout sklerijen mysteriou ar feiz.

P'an doa an dour sakr ruillet var e zal,
He c'halon gant joa a dridas raktal.

He genet dispar, he furnez braded
Rea d'an dud vras he c'hask da pried.

Mes ar verc'h santel da Jesus ebken
Zo en em vœstled evit birviken.

He zad kounnaret a denn he gleze,
Da laza he verc'h oc'h ober al le.

Barba geaz spountet a gemer an teac'h
'Vit en em zïoual ouz fulor e vream'h.

P'an doa e c'havet, he zad e sklejas,
He bresas zoken hag e frisougnas.

Goude Dioskor, da di Varsien
A gasas Barba, 'vell ar gristenien,

Guerc'hes henoret, eme ar barner,
Klask a ran ho mad, silaouit va ger :

Diskoezit d'an oll o peuz guir furnez,
A d'hon Doueou doujit a nevez.

Nan, eme Varba, ne stouin biken
Dirag Idolou 'zo labour an den.

Kerkent ar Santez a oue skourjezet,
Gant kribinou kris he memprou roget.

Hag ar verzerez 'n'em gave euruz
Da hellout gouzaon evit e Jesus

Erfin, an tyrant skuisset gant Barba,
Roaz d'ar bourreo' urz d'he dibenna.

Mes, ô tra euzus ! klevit Dioskor :
Da laza va merc'h, d'in-me an henor !

P'arruas Barba 'leach he sakrifis,
En em ginnigas da daol he zad kris.

Dindan ar c'hleze, e fenn a gouezas ;
He ene d'an env raktal a nijas.

P'an doa Dioskor e grim achuet,
Gant eun tarz kurun e oue pulluc'hed.

C'hui, santez Barba, zo breman eureuz,
Astennit varnomp ho tourn galloudus.

Ra vimp, var ho skoër, nerzus en hor feiz,
Treac'h da Satan, de œuvrou direiz.

Devotion vras a zo, en peb bro,
Deoc'h santez Barba, dreist oll en Rosko.

Araok goulou deiz, epad ho naved,
En ho chapellik e vemp daoulinet.